

N° 1

1<sup>er</sup> Novembre 1926

# KANNADIG INTRON VARIA KERZEVOT



Prix de l'Abonnement : 6 francs

Le KANNADIG ne se vend pas au numéro



# Perak

## ar c'hannadig - man

« Anez Kaout skiant Doué da genta,  
« Gouiegez all ne deo netra. »

An deilhennig-man n'ê ket hir bras ; frank awalc'h eo goulskoude evit lakat da bara dirak ho taoulagad eur gentel pe eun ali bennak, ha rei kelou eus ar pez a dremen er barrez.

Kelennadurez, setu ar pez hon eus c'hoant da genta. Ar spered en deus ezomm sklerijenn ; eno eman e vagadurez, e nerz, e yec'hed. Ma n'en deus ket kelennadurez ar spered a denvalaio, a zemplaio, hag a varvo.

Digoueout a ra gantan evel ar c'horf : d'ar c'horf eo red kaout boued evit chom en e zav ha labourat. Met, evel ma ra boued trenket droug d'ar c'horf, evelse ive an traou gaouiat a vez desket d'an den, an diviziou milliget a vez plantet en e benn, ne reont nemet dizrei anean diwar e hent, ha renta e vuhe didalve, pe noazus zoken d'ean e-eun ha d'e nesa.

Eur wirione anaveet a bell zo eo houman : dioc'h ar gelennadurez ho po bet e vo greet kredennou ho spered hag holl menoziou ho kalon. Hogen dioc'h ho kredennou hag ho menoziou e renot eur vuhe mat pe fall, talvoudek pe dildalve.

Dre ma zeer gand an hent e weler tud a bep rumm : darn a zo pinvidik, darn all a zo paour ; lod a zo gouiek lod all divouiek. Daoust ha c'hoant hon dije da lakaat an holl war an douar ken ês, ken am ar ?

Her goût a rit, bez'ez eus eur strolled tud, ar zosialisted, tud ar boutin bras, hag o deus hunvreet sevel an dud holl war ar memez planedenn : rei da bep hani kement ha kement da labourat, kement ha kement da veva. Hag evit kas da benn o zorc'hen divoued, emaint bemde o lakât dizurz er broiou, o rei da gredi d'ar micherour paour ha d'an den

reuzeudik eo ker koulz greet hag an holl dud a c'halloud hag a vouiegez da c'houarn ha da gempenn an traou. War glevet an dispac'herien-man, ar bobl en deus gwir d'ober pep tra ha never ebet da heulia !...

Konchennou diskiant, gevier noazus, setu petra skignont, ha kement breuriez a ziazeint war o zorc'hennou goullo ne badint ket ha na dennint nemet da fall ; evel an tiez savet war an trêz a c'hoarve gand o staliou : Kouea ' reont en o foulh hag e ravinont o ferc'henn.

D'ar preegerien fôs-man e vank sklerijenn ar feiz hag a zesk d'omp holl e tleomp chom pep hani en e stad, dindan daoulagad hor C'hrouer hag hor Mestr, hag ober implij eus an ijin, euz an nerz a zo roet d'omp. Holl n'hon eus ket kement ha kement a spered ; koulz yec'hed an eil hag egile ; holl kennebeut n'hon eus ket keit ha keit a vuhe.

Eur Mestr'zo, eur Mestr hag en deus lakeet kemm etrezomp. Falveet eo gantan lakât kemm etrezomp, abalamour d'omp da gaout ezomm an eil eus egile, heman eus danve e vreur, egile eus labour e gonsort ha poan e zivrec'h.

Eun hevelep planedenn hon eus er bed-man : kerzet holl war-zu ar baradoz, met pep hani a dle evit kement-se chom er stad, el lec'h hag en doare m'eo lakeet.

Sklerijenn ar feiz eta a zalc'ho ac'hanomp e pep urz vat, dirak Doue ha dirag an dud.

\* \* \*

E kenver sklerijenn ha kelennadurez ar C'hannadig a gaso keleier ar barrez : kelou ar beo hag ar maro, kemennadurez eus hor goueliou iliz hag a gement tra a raplijadur da glevet ha da c'hoût.

Konta ' raio ive Istor hor Bro, me fell d'in lavaret Istor Breiz, Istor ar Vretoned. Er skol ez eus bet desket d'omp Istor ar C'hallaoued, Istor pôtred Pariz, met Morse hani hon tadou.

Piou ac'hanomp en deus klevet hano er skol eus Nominoe pe eus Morvan, les-hanvet Lez-Breiz ? Hor bro a zo bet digabestr epad mil bloâ, gouarned gant he Rouaned hag he Duked, ha ni ne ouiemp dare !... N'ouzomp ket, ha n'ê ket ar C'hallaoued eo zesko d'omp, ar poaniou gouzanvet gant hon tud abaoe m'eo stag hor Bro ouz bro-C'hall. Pa ouezo ar Vretoned Istor o Sent koz, o Rouaned, o Duked, e teuint da garout muioc'h mui bro o c'havel, an douar santel eoc'h m'eman douaret relegou o zud koz.

Deski d'el lennerien pegen eñirus oa gwechall ar Vretoned p'oa Breiz eur vro dishual, setu eil menoz ar c'hannadig.

Ar pennad labour-man a vo skrivet e galleg. O ! n'ê dre fae evid ar brezoneg ! Ar brezoneg a jomo ato ar yez muia karet evidon, ar yez em eus desket war barlenn va mamm. Met, er Veilh-Baper, ez eus hiniennou ha n'int ket eus ar vro, hag o devo goulskoude plijadur o lenn hor c'hannadig. Fizians em eus e poanint da zeski ar brezoneg, pegwir e vevont etouez tud ha ne gomzomp koulz laret nemet brezoneg. An hani a oar diou yez a zo pinvidikoc'h eget an hani ne oar nemet eun.

Fouge a c'hell bea ar c'hannadig o vont en hent gant e wiskamant kaer, livet gwechall gand an otrou Madec, p'edo kure en Ergue-Vras. *Kannadig Intron Varia Kerzevot* ne rei nemet kendelc'her al labour boulc'het arôk ar brezel gant : « *La Voix de N. D. de Kerdévet* ». Ha mar deo hardiz o vont da skei war an holl doriou eo, dre ma c'hoar e kavo dor zigor ha skoazell. Hogen an tu d'e skora eo e gemeret diouz ar bloâ. N'ê ket daou skoued, priz eun hanter lur aman, a viro ouz den da rei d'ean eun tammig skoazell.

Goût a ran ive e vo joa gand an dud o deus kuiteet o bro kaout kelou eus o zud, o mignonned, o amezeien. Ar c'hannadig bep miz a gaso d'eo ar pez a dremen en o farrez : ar badianchou, an eureujou hag an entramanchou. Alia'ran eta ar familhou da zigas d'in hep dale anoiou o c'herent a zianvez parrez, zoken re ar zoudarded, hag an dud a zo o labourat e kér.

Ra blijo gant Intron Varia Kerzevot skuilh he bennoz war he c'hazetennig ha skigna anei en holl familhou kristen ar barrez.

Y. G.

---

## KANAOUENN AN ANAON

---

An Douar a-bez a zo e Kaon... emomp e miz Du... goude bea bet goloet gand eur ballenn gaer a vleuniou hag a frouez, an douar zo skubet diwarnan gand an Diskar-Amzer ar pez a ree dudi ha plijadur an daoulagad. Ne skuized tamm o sellout ouz an traou kaer-ze, ha breman hon daoulagad a ra poan d'eo gwelet an douar ken disliv ha ken trist ma'z eo gand e zilhad kaon.

An Iliz a-bez a zo e kaon, emaomp e Miz Du... goude  
bea bet tremenet miziou alaouret an eost ; ha goude bea  
enoret gand ar c'haera lidou an holl zent a sked gand ar  
c'hloar e-harz treid an aotrou Doue, en e Varadoz, an Iliz  
e deus gwisket he dilhad kaon, a zo koueet d'an daoulin  
evit pedi evid an Anaon kez, hag hor ped i've da stoui d'hon  
tro ha da gas warzu an Otrou hor pedennou starta ha  
kaloneka evit ma tiboanio an Anaon ; rak gouzanzv a reont  
er Purkator ar poaniou skrijusa.

Holl e tleomp bea e kaon epad Miz Du ; rak, piou en  
hon touez n'en deus ket eun bennak eus e dud eet d'ar bed  
all ? An ankou a zo deut didrue da skei war hor familhou  
holl ; met, daoust m'en deus lammet diganomp ar re a  
gariemp, n'en deus ket gellet terri gant dir e falc'h *al liamm a garante* hon stage start an eil ouz egile.

E pelec'h emaint breman ? Marteze gant Doue en e  
Varadoz, ha marteze siouaz ! o leski e tan ar Purkator !  
Koueomp d'an daoulin ha pedomp evid an Anaon Kez.

Gwechall-goz, pa vee deut an noz hag eet an dud da  
gousket, peorien ar barrez a gane, a zor da zor, ar ganaou-  
enn-man, Kanaouenn an Anaon :

**Han'Tad, ar Mab, ar Spered-glan,**  
**Yec'hed mad d'oc'h, tud an ti-man,**  
**Yec'hed mad d'oc'h, war boez hor penn**  
**Deut omp d'ho lakat er bedenn**

**Pa sko ar Maro war an nor,**  
**Stok er c'halonou ar C'hren-mor ;**  
**Da doull an nor pa zeu'r maro,**  
**Piou gand ar maro a yelo ?**

**Hogen na vec'h ket souezet,**  
**Da doull ho tor mar domp digouet,**  
**Jezuz en deus hon digaset**  
**D'ho tihuna mar doc'h kousket.**

**D'ho tihuna tud an ti-man,**  
**D'ho tihuna, bras ha bihan :**  
**Mar deus, siouaz ! truez er bed**  
**En han'Doue hor zikouret**

**Breudeur, Kerent ha mignonned,**  
**En han'Doue ! hor zilaouet**  
**En han'Doue ! pedet ! pedet !**  
**Rag ar vugale na reont ket.**

Gand ar re hon eus-ni maget,  
Ed omp pell zo ankounac'het,  
Gand ar re hon eus-ni karet,  
Hep truez, ez omp dilezet.

Ma mab, ma merc'h, c'houi zo kousket-war ar plun dous ha blot meurbet,  
Ha me ho tad, ha me ho mamm  
Er purkator e kreiz ar flamm.

C'houi zo er gwele kousket ês,  
An Anaon paour zo diês,  
C'houi zo er gwelet kousket mat  
An anaoun paour zo divat.

Eul linser wenn ha pemp plankenn,  
Eun dorchenn blouz dindan ho penn,  
Pemp troated douar war c'horre  
Setu madou ar bed er be

Ni zo en tan hag en anken :  
Tan dindanomp, tan war hor penn,  
Ha tan war lae, ha tan d'an traon ;  
Pedet evid an Anaon.

Gwechall pa oamp e-barz ar bed  
Ni boa kerent ha mignonned  
Hogen, breman p'edomp marvet  
Kerent, mignonned, n'hon eus ket.

En han'Doue, hor zikouret !  
Pedet ar Werc'hez benniget  
Da skuilha eul lomm eus e lez,  
Eul lomm war an Anaon kez.

Eus ho kwele prim dilammet,  
War ho taoulin en em strinkellet  
Nemet kouet e vec'h er c'hlenved  
Pe gand ar maro kent galvet.

O klevet eur ganaouenn ken truezus, an holl a zave eus  
gwele hag en em strinke d'an daoulin da bedi evid an  
Anaon kez ; ar beorien a oe e toull an nor hag a zalc'he  
plaz an Anaon, ne veent ket dizonjet ; goude m'o doe bet eun  
aluzenn kaer e kendalc'hent o zro-vale a-dreuz ar c'hoajou  
hag al lanneier, epad ma sone kanvus ar c'bleier ha ma  
hirvoude klemmus an avel.

# Yann ar C'hloier

MARVAILH EVIT PARDAE AN HOLL ZENT

---

E-eun eman en e doullig ti, ar paour kez Yann, trouz an nor hepken o storlokat gand an avel, trouz all ebet ne glever breman p'e deut an noz. E-eun eman, azeet en eur gador bet,kredi'ran, e-touez arrebeuri e dad kunv. Astennet gantan e zivesker hanter zonnet, e kas e dreid da domma beteg al ludu klouarig, hag ec'h en em ro da huvreal.

Paour kez Yann! Ne deo mui yaouank,hag e gorf a zo deut da skuia dindan samm ar bloaveiou. Ya koz eo, koz-Noe ! Dizonjet e rank bea gand an Otrou Doue war an douar warlerc'h tud e amzer. Eus a gement zo bet o c'hoari gantan, ped a jom ? Hani ebet, siouaz ! Skubet int bet holl an eil warlerc'h egile. Setu perak Yann a zo skuiz, skuiz kena ken war an douar, hag e kar muioc'h-mui en em denna a goste evit bea e eun en e doullig ti, kuet harp ouz an iliz goz, e-tal an tour.

E iliz, e dour, setu e wella mignonned ; n'eus nemeto hag a zavarfe d'ean mat, eus an amzer goz. Ha piou eta anaez ar barrez eveldan ?

Tost da bevar ugent vloaz zo ma wiskas evid ar wech kenta sae ru ar varchikoded, hag abaoe eman war-dro an iliz. Setu perak e kred awechou sevel e vouez da laret d'an trou person : « An dra-man, trou person, a zo bet greet ato evel-se. »

Ha pa fell d'an trou person rei digemer d'eur c'hiz nevez kavet mat gantan evid ar barrez, eo red d'ean stourm ouz Yann ar C'hloier, ato krog gand e zaou zorn er c'hiziou koz.

Red eo d'in aman laret oa Yann sakrist, kloier ha touller beiou war eun dro ; an holl labourou-ze avat a zo deuet da vea re bonner evitan. O ! n'e ket eon hen anzav ; evel droug yaennan zoken pa vez hano gand an trou person rei skor d'ean.

Hirio koulskoude eo red mat d'ean anzav eman e nerz o vont digantan ; en em gaout a ra skuiz en abardae-man eus gouel an Holl-Zent, skuiz evel an deliou melenet a zistag eus ar gwê, a dro hag a zistro, kaset ha digaset gand avel an Diskar.

Eur pez labour en doa bet d'ober en derc'hent, o lakaat pep tra en urz a-benn ar gouel ; hag ar gouel e-eun gand e lidou hir en deus tōlet anean er gador vourret, el lec'h ma chomo, hep gellout zoken sevel da aoza e dammig koan.

Sellet a ra gant tristidigez ouz ar skourrou moan a zo war an oaled, bet dastumet gantan hani da hani ; dont a ra zoken en e spered ar zonj eus ar boan en doa o samma e hordennig keuneud sec'h hag o tigas anei beteg ar ger. N'e ket mat ken da netra, ha tost eo evitan devez an diskuiz bras. Ha ma ne deu ket an otroù person da gas anean diwar e dro n'eo ken gand aon d'ober poan d'ean ; met, Yann ne fell ket d'ean laërez pelloc'h an arc'hant a lakeer etre e zaouarn ; e zilez a roio eta ; eun toulladig arc'hant en deus en e bodig-espern, peadra da c'chedal ar maro....

A zo ês da laret !.. met... hag ar gwel eus eun-all oc'h ober e labour !... Gwelet eun all o lakaat bokedou war an ôter, o skuba an iliz, o lakaat bole er c'hleier !... Daoust a gellout a ray chom reiz da zellet ober an traou-ze ? Met, n'hello ket mont d'an oferenn, gand aon ne zigouefe d'ean lammet da c'houg ar c'hloier neve da laret d'ean : « Ro d'in adarre ! N'ouzout ket diouto !... »

Ha setu en eun tōl Yann o chom krenn a-zav gand e gôz : deut oa sonj d'ean oa'r mare da zini glaz an Anaon.

Sonj a deuas d'ean ive eus ar pez en doa laret an aotrou person goude ar gousperou : « It da c'hourvez Yann, eun all a ray ho labour en abardae-man. »

Eun all da zon ar c'hleier evitan ? O ! nann avat, biken, keit ha ma vo eur veradenn wad en e wazied ! Biken, ne lezo eun all da gregi er gordenn a laka bole er c'hloc'h bras hag er c'hloc'h bihan. E gleier ! o c'haret a ra muioc'h zoken egred e iliz, e vered ! Daoust ha n'oant ket beo ! Daoust ha n'o doa ket eur vouez, koulz lavaret eun ene, hag a gemere perz e levenez hag e tristidigez an holl.

Yann a zavare ouz e gleier evel pa vijent bet speredet d'e zelaou ; evit gwir ar wirione a rank bea lavaret, goût a ree lakaat aneo da gana evel ma karie ; ha setu perak Morse ne vije fellet d'ean lezel eun all d'ober e labour.

Ha neuze, piou oar ? Marteze o dije nac'het senti ouz eun all ! Boez evel m'oant abaoe kemend a vloaveiou da zenti ouz an hevelep mestr, ouz Yann goz ar c'hloier...

Erru oa an noz ; ha setu eun tammiq nerz o tont d'ean adarre en eun tōl ; lijer oa e dreid zoken o treuzi ar vered, deut da vea evel eul liorz leun a vokedou ; plijadur a ree d'ean gwelet noa ket dizonjet " ar re goz ". Mont a ra en iliz

leun a denvalienn serr-noz. Goulaouenn ebet war elum en iliz, nemet steredennig ru an tabernakl. Mont a ra tre d'an nec'h, betek kordenn ar c'hleier ; seblantout a ra d'ean bea yaouankeet evel eur pôtr a ugent vloâ.

Ar c'hêz koz a reas eur jachadenn war ar gordenn, a zaoublegas var e voutou, hag a c'hleier da zenti kerkent ouz ar vouez anaveet hag o kana en o-neiz. Nag e kanent brao en noz-se ! Pegement e vijed douget da anzav o doa, eun ene. Hag, e gwirione, eun ene o doa, ene Yann a-bez a oa eet enno. Awechou e seblantent bea evel mouez eur vamm o luskellat he bugel; awechou-all ar vouez a grenvee betek dont da vea evel eur c'hlemm garo ; hag ar vouez a zave, a zave ato uheloc'h uhela, betek an nenv, evit kana ar vuhe, ar fizians kristen, an eurusted peurbadus. Hag ar vouez a nije war ar mês, a ger da ger, beteg ar penn pella eus ar barrez, o kas d'an holl ar zonj eus an Anaon kêz, o c'chedal sikour pedennou ar re veo evit bea diboaniet.

\* \* \*

Koulskoude Yann a jache ato war gordenn e gleier ; skrijadennou skournet a rede dre e wazied paour ; met, eun nerz neve a deue d'ean ha ne zante skuizder ebet.

E zaoulagad o para war neiz ar c'hleier, Yann a wel bremen e holl gerent, e vignoned koz, ar re holl o doa roet o c'horf d'ar vered da ziskuia e skeud an iliz. Tremen a reont dirazan oc'h hen alia da vont ganto : krog mat oa er gordenn, ker krog zoken ma sanke e ivinou er c'hanabr.

Stered an nenv a varve en oabl, an denvalienn a yea da guhat, hag an diweza eus Anaon ar vered koz a yea a ziwar wel. Klevet e voe neuze en iliz didrouz eur vouez skiltrus o c'hopal : «Gedit ac'hanon ! »...

Ha kerkent Yann a glevas eun dra bennak o strakal ennan : eun huanadenn a darzas war e vuzellou, e zaouarn a ziskrogas hag a ziruilhas hed-a-hed ar gordenn ; ha neuze, en-dra ma kouee e gorf maro war leurenn an iliz, ene Yann dizammet a nije d'an Nenv douget war ganaouennou kanvus ar c'hleier.

Ar c'hloier koz a oa maro war an dachenn, maro oc'h ober e labour.

\* \* \*

En uhel goulskoude ar c'hleier a zone bepred, hep ma vije den o lakaat bole enno... An daou gloc'h eur pennad c'hoa, a jomas da zon glaz da Yann ar c'hloier...

# Documents pour servir à l'Histoire d'Ergué - Gabéric

« Ils aimaient leur pays,  
et le faisaient aimer.

BRIZEUX.

## - L'ARMORIQUE -

Notre Bretagne, qui se nommait autrefois Armorique (le Pays de la Mer), est une vaste presqu'île située à l'extrême occident de l'Europe. C'est un pays essentiellement maritime, baigné par la Manche et l'Océan Atlantique.

La Bretagne est arrosée par de nombreux cours d'eau, dont les principaux sont la Rance, l'Odet, la plus belle rivière de France, le Trieux, l'Elorn, l'Aulne, le Blavet, la Vilaine, la Loire enfin qui a son embouchure en Bretagne et traverse Nantes.

Ces rivières prennent, pour la plupart, leurs sources dans notre massif central, c'est-à-dire dans le Méné, le Mene-Du et les monts d'Arez.

Jadis, le pays était, en grande partie, couvert de vastes forêts.

L'Armorique fut primitivement peuplée, à l'époque de la pierre polie, par une race à peu près inconnue, à laquelle on attribue les monuments mégalithiques, les dolmens et les menhirs, si nombreux dans notre pays. Les Celtes s'établirent ensuite en Armorique à une époque très reculée.

## Nos Ancêtres les Celtes

Avant l'ère chrétienne, les Celtes peuplaient une grande partie de l'Europe ; ils étaient de race aryenne comme les Grecs et les Latins. Alors que ceux-ci se modifiaient plus ou moins au contact de l'Orient, les Celtes, au contraire, surent garder l'ancienne tradition ; de là, deux principales formes de civilisation : l'une très active et très brillante, dont les peuples d'éducation latine, comme la France, ont hérité, l'autre, moins puissante, mais plus originale et plus idéale, dont nous autres Celtes gardons l'empreinte.

Les Celtes étaient grands, blonds, avec des yeux clairs ; leur beauté était célèbre, ainsi que leur force et leur courage. C'était une race hardie : pour eux la bataille était une fête et le vrai chemin du bonheur promis aux braves dans le *Gwenva* ou *Paradis celtique*.

Devant eux l'armée romaine effrayée s'enfuit, et sans coup férir ils entrèrent dans Rome ( Juillet 390 avant J.C. ). Ils l'incendièrent après l'avoir pillée de fond en comble. Mais le Capitole, c'est à dire la citadelle, résista. A la faveur d'une nuit obscure et orageuse ils tentèrent de prendre cette forteresse d'assaut. Déjà les plus intrépides arrivaient au haut de leurs échelles. Ils allaient poser le pied sur la muraille, lorsque les Romains, réveillés par le cri des oies consacrées à Junon, accoururent et renversèrent les assaillants. Cela n'empêcha pas les Celtes de rester six mois à Rome. A la fin ils traitèrent avec le dictateur romain qui acheta leur retraite au prix de 1000 livres d'or. Au moment où on leur pesait cette rançon, les Romains, rapporte Tite-Live, se plaignirent de ce que les vainqueurs se servaient de faux poids. Pour toute réponse, le brenn ( le chef ) jeta encore sa lourde épée dans la balance, en criant : « malheur aux vaincus ! »

Ils ne craignirent pas de s'avancer jusqu'en Macédoine, où régnait Alexandre le Grand. Ce puissant guerrier, espérant une flatterie ou pensant intimider les Celtes, demanda à leurs ambassadeurs : « Qui craignez-vous ? — Nous ne craignons qu'une chose : que le ciel ne nous tombe sur la tête ! — Les Celtes sont fiers, dit Alexandre, et il fit alliance avec eux.

### Les Druides

L'intelligence des Celtes était vive et très cultivée ; ils avaient de vrais savants, les Druides, qui n'étaient pas seulement des prêtres mais aussi les gardiens des traditions religieuses et nationales et surtout les éducateurs de la jeunesse. Ils formaient une caste puissante ; leur influence était considérable ; ils disposaient même de peines morales assez semblables à l'ex-communication et très redoutée.

Les Druides avaient des doctrines élevées : ils croyaient à la vie future d'une manière plus nette que les autres païens. Leur enseignement a laissé en nous des traces profondes et développé, avec nos tendances idéalistes, notre originalité qui survit aux conquêtes et à des siècles d'éducation étrangère, saxonne ou latine. Malheureusement l'enseignement druidique était exclusivement oral ; aussi est-ce par des étrangers que nous connaissons le rudiment de ses doctrines.

Les Celtes avaient également des poètes et des artistes.

Les Bardes occupaient un rang élevé dans la société celtique ; le peu que nous connaissons de leurs œuvres en atteste la valeur littéraire.

On trouve aussi des motifs d'ornementation de style celtique qui indiquent par leur perfection une civilisation avancée et plus originale que celle des Latins, dont l'inspiration est grecque ou orientale.

### Système politique

Les Celtes avaient une forme de gouvernement qui leur était particulière ; ils n'étaient pas centralisateur comme les Latins, mais formaient des fédérations composées de tribus autonomes, gouvernées par leurs chefs héréditaires et réunies, en cas de guerre, sous l'autorité d'un chef unique. C'est de là que vient le vieux système breton des plous, qui a survécu si longtemps en Bretagne.

L'esclavage existait peu chez les Celtes ; les métiers étaient exercés par des hommes libres, formant des castes honorées et puissantes. Les méthodes celtiques étaient si perfectionnées que les Latins eux-mêmes empruntèrent beaucoup à nos ancêtres, surtout en ce qui concerne le charronnage, la teinturerie et l'agriculture. Les Celtes opposaient malheureusement un grave défaut à leurs qualités : ils ne savaient pas s'unir, même pour repousser un danger commun. Leur humeur belliqueuse les entraînait à des guerres continues et leurs querelles intestines seront d'une aide puissante aux Romains, lors de la conquête. « Les Celtes unis peuvent défier l'Univers », disait Vercingétorix, le héros de la lutte contre les Romains.

Par malheur les Celtes étaient divisés ; ils formaient une foule de tribus, une soixantaine au moins, souvent rivales ou hostiles. Bien plus, chaque tribu était divisée par les familles qui aspiraient à y exercer le souverain pouvoir.

Et c'est pourquoi, au milieu du premier siècle avant J.C. les Romains, déjà maîtres d'une grande partie du monde, purent soumettre les Celtes. Une expédition spéciale fut dirigée contre les Armoricains en l'an 56 par le général romain Jules César.

« Qu'ils sont terribles, écrira César, les Bretons, quand ils disent : « Torr e benn. » Braves jusqu'à la témérité, mais mal armés et indisciplinés, ils furent vaincus en deux grandes batailles : l'une sur terre aux environs de Coutances, l'autre sur mer qui se déroula, semble-t-il, au large de la presqu'île de Lokmariaker, près de Vannes.

Les Romains, triomphants, organisèrent le pays conquis. Ils sillonnèrent l'Armorique de routes nombreuses, dont on retrouve encore le robuste dallage et qui reliaient les postes militaires aux villes romaines.

Ces routes, les Romains n'eurent pas bien entendu, à les ouvrir toutes, plusieurs, à n'en pas douter, étaient d'anciennes

voies celtiques, encore que des historiens prétendent que les Celtes n'avaient point de routes, mais seulement des pistes ou des sentiers. Pas de villes, ajoutent-ils, mais seulement des camps et des marchés ; pas de maisons, mais seulement des huttes de bois couvertes de chaume.

Les Colons, qui suivaient les légions romaines, enseignèrent aux Celtes à maçonner leurs constructions, et ils s'y entendaient ! Ils batissaient des villes, ils firent d'Is une merveille, si nous en croyons la légende, ils fondaient des écoles, des temples aux divinités païennes, des théâtres, des arènes, des ports.

Le christianisme fut bientôt prêché en Armorique. Des évêchés furent fondés à Rennes, Vannes et Nantes. Les premiers martyrs de la foi sous la domination romaine, furent les saints Donatien et Rogatien, que Nantes a pris pour patrons. Mais la religion du Christ ne tarda pas à triompher.

(à suivre)

---

Du 1<sup>er</sup> Octobre au 1<sup>er</sup> Novembre.

## Baptêmes

- 1<sup>er</sup> Octobre. — Catherine-Jeannette Bellinger de Kerangueo.  
2 Octobre. — Marie-Lucie Le Menn de Ty-Coat.  
4 Octobre. — Yvon-Jean Pennanec'h de Kelenne.  
14 Octobre. — Pierre-Marie Le Bihan de Kelenne.  
25 Octobre. — Louis Le Gall de Ker-Anna.
- 

## Mariages

- 12 Octobre. — Jean Loheac et Marie-Catherine Diverrès.  
Jean - François Diverrès et Marie - Jeanne Le Grand.  
Alain Péron et Corentine - Marie Le Berre.  
Hervé Huitric et Marie-Josèphe Gourmelen.  
19 Octobre. — Jean-Louis Divanac'h et Catherine Le Roux,  
Melenne.  
Roland Maurice et Catherine Istin.
- 

## Décès

Noèle Bréus, de Ker-Anna, 67 ans.